

**Rolland Charles** (Lanneanou 1862 – Gwerliskin 1940)

A-du krenn e oa Roallnd gand lezenn ar 1<sup>a</sup> viz Gouere 1901, diwar-benn breuriezou al leaned hag al leanezed.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

## **Da baotred stard Breiz !**

Dirag an drouz a reer en Breiz  
E strak ma halon stard em hreiz !  
Ma n'hellan anez beza kabluz  
Tevel pelloh war dud kazuz.

En tu ar wirionez, eneb an dreitourien,  
E tiouesklinin ar Gaou en Breiz da virviken !  
War hent ar lealded e vin kavet atao :  
Gwaz d'an Drubaderien a gouez dindan ma fao !

Ma mennad eo kerzed 'trezeg eur vuhez well  
A lakaio evruz eun deiz ar bobl izel ;  
Pa mom diwar on chouk sklapet kuit ar pezh samm  
'Deus laket dem warnañ paotred o zroiou-kamm,  
'Vid ma n'hellfom biken gweled evelte ;  
A vezo mad hag evruz deuz c'hwezenn ar bobl kêz  
A zalhont ivez 'vid se er brasa dallentez.

Nerz kement gwaderez  
'Zo en on dallentez,  
En on lezoregez,  
En on zempladurez.

# Da baotred stard Breiz !

*War an ton a gerfot.*

## I

Sonn ar penn ! neb 'n-eus gwad ! ha bezom oll war hed !  
Prest da rei deuz vo kont, eun taol-chao ! mar bez red :  
An enebour kouezet, divergont, a zao c'hoaz  
Hag a garfe lakaad reveulzi sort biskoaz !

Dizorhennet<sup>1</sup> bep taol kanfarted an tu gwenn  
A stoum, a frink, a hop ! hag a hoari o fenn !  
Daosut ha ma vezont dornetn en pep votadego'  
'Deus c'hoant 'vid kement-se fonta<sup>2</sup> mestr en or Bro

Kement digarez fall 'zo mad deze, kredit deh<sup>3</sup>,  
'Vid lakaad gwall dizurz ha bosenn en peb leh ;  
Rag ne glaskont ken tu, ken sorhenn deiz ha noz,  
'Med gouarn war ar Bobl evel en amzer goz.

Lezom int da youhal ! dalhom on troad er pal !  
N'hellfont ket ken a-bell, kaer o devo tumpal<sup>4</sup>.  
Pobl Frañs sklêrijennet he-deus lavaret stard  
Rei beh d'an dud noazuz ! d'ar gaouiad, d'an trubard !

Ar Republikaned, 'benn ma'h ay mad an traou  
'Oar mad eo red deze disprada<sup>5</sup> nêt ar Gaou ;  
Gweled sklêr en eur wech 'barz en peb doare kamm  
'Vid gelloud gand eeunder rei da beb den e zamm :

Rag eur rumm a-viskoaz 'oar kement a ardou  
Ma'h ententont beza diskarg a druajou ;  
Ne da bep sort poaniou kuit a zienez,  
Hag e oar brao an tu deze 'n em denn sioul er-mêz ?

'Vid tremen lost al leue 'biou genou ar re all  
Eun darn 'deus ijinet eun doare n'e' ket fall,  
A oar digarez dond d'en em rei da Zoue ( ! )  
En em dennont kempenn deuz kargou ar vuhe'.

O micher didalvez eo drailla paterio' ;  
Kousked o hensorted war goz kaoziou goullo ;  
Eren an dud dister, oll dindan o lezenn,  
Gand lavariou kontrol d'o buhez penn-da-benn.

---

<sup>1</sup> Dizorhennet : diguzet.

<sup>2</sup> fonta : marteze : o vond da veza mestr.

<sup>3</sup> deh : deoh.

<sup>4</sup> tumpal : fichal.

<sup>5</sup> disprada : diskar. Marteze "dis + prad+ a"

Dibabet gand Doue ( ! ), ar Zent hag an Êlez ( ! ),  
Goloet deuz traoñ-kreh gand broz ar zantelez ( ! )  
Kristen deuz tud ken flour ma soñjfe ‘n em diwall  
M’o-deus eur perz iskiz ! war gorre ar re all :

Gwalleur amañ d’ar re a ziskar o homziou.  
Barnet ‘vefont gante abred d’an Iverniou !  
C’hoaz e vint forgaset kement ha ken bihan,  
Ma rankont bale sioul, pe ober kovig-moan !

D’o stal eo red kredi heb gweled na kompren ;  
Senti geb grozmoli war-eeun d’o gourhemenn ;  
Chom dall, mud ha bouzar a gorv hag a spered ;  
Mond da heul ‘vel eul leue, pe gredit, pe ‘rit ket !

‘Vid kenderhel ar bed en eun heveleb stad,  
Eo e sao ar re-mañ kalz skoliou ; kredit mad ;  
Leh ‘vez klasket ober deuz paotr ha deuz paotrez  
Eur pezh kristen diod ! klufan pe bigodez !

Rag micher beleien, meneh, leanezed,  
‘Zo deski d’ar re all ar pezh na gredont ket ;  
Rag seul-wir ma kredo an dud bicherezou<sup>6</sup>  
‘Vint êzet da skleja dre o fri er poullou !

Peb doare divalo deuz o ferz ‘vez mad :  
Ar haerra traou, barnet, pa vezont ket deuz o grad.  
Pa fazi ket ar Pab, kredit deoh, int d’o zro.  
Deuz urz en e ano da ober kement ‘zo !

Ma ne zimezont ket n’en deo ‘med ‘vid beza  
Dishual da skrapa ha kaoud ar pep gwella !  
Se n’harz ket deuz eun darn da gemer plijadur  
Ha da zarempredi meur a blah koant ha fur ( ! ). v

## II

O galloud, eur wech choaz, ‘zo divent ha dispar !  
Mistri ‘fell deze beza en Neñv ha war Zouar :  
Deze om korv hag ene, ne dalv ket lared nann,  
Adaleg ma vezom bet bete ma’h eom ahann !

O halon ‘zo distag deuz mad ar bed paour-mañ !  
Ha ‘velkent e karfen dastum oll anezañ :  
An oll draou deze ‘zo mad, ed, amann ha kig-sall...  
A flemmont<sup>7</sup> diganem o c’hoari mouchig-dall ?!

Dastumit da gas deze pezh a gerfot d’o zi,  
Biken gweneg ne deu deuz o ferz d’ho hini ;

---

<sup>6</sup> bicherezou : ?

<sup>7</sup> flemmont : laeront.

Poagnit oll heb ehan, c’hwezit an dour, ar gwad !  
An hini diwar ho koust er heit-se ‘ray chervad !

Ya ! d’an dud a Iliz, kasit a bep sort traou !  
Magit an dud santel evel moh lard ‘n o hraou ( !).  
Gante ‘mañ an alhwez a zigor dor an Neñv,  
Ha ma ne baeit ket e chomfot pell a-dreñv.

Kasit ! kasit atao !peurleugnit deze o yalh !  
Biken ne vint klevet o lared ‘z eo a-walh :  
Red eo kaoud brahellou<sup>8</sup> ‘benn derhel en e blomm  
Stad dizemez ‘zo dindan lezenn Rom ;

O danvez ‘h a d’o heul ‘bazz ar houentchou braz,  
Leh e reont koñvers d’her hreski muioh c’hoaz ;  
Dre n’o-deus na bugel, heritour, na mignon  
E talhont da vernia bep taol madou eston !

Pa n’o-deus eveldom bugale da vaga,  
Na tad na mamm war hent<sup>9</sup>, na trubuil gand netra ;  
Pa om oll o kas deze, na sort ‘deu war e giz<sup>10</sup>,  
Sklêr-mad o-deus eun tu eur huz<sup>11</sup> spont hag iskiz !

Ar boan hag al labour atao d’ar memez rumm.  
En-pad ma ‘mañ e benn o vernia, o tastum !  
Ha c’hoaz ne fell ket deze d’e zikour da baea tamm gle  
A rank peb den gwirion d’e Vro ha d’e gontre :

Dastum an oll vadou ‘vid kaoud eun nerz dispar !  
Da zerhel ar re all dindan o zreid, war var ! !  
Setu eno, tud kêz, stad ar beorien iskiz !  
Kuzet dindan mantell Mamm Zantel an Iliz...

Estlammet gand abeg deuz eun heveled stad  
Gouarnamant Bro-Frañs a reas eul lezenn vad,  
Da reiza o breuriez, da blennaad o doare,  
Ha gweled sklêr en madou peorien ken a-zoare.

Ha kerkent garm ha trouz ! ha kounnar en o hreiz !  
Evel pa ve an tan en pevar horn a Vreiz.  
Arabad eo stoka ar biz deuz o gwiriou,  
Dindan boan da veza daonet a-bennadou<sup>12</sup> !

Paotred o lien-groñj<sup>13</sup> a zañs a-skrign o dent !  
Gwasoh evid diaoulien, tamm heñvel ken deuz sent :

---

<sup>8</sup> brahellou : berniou

<sup>9</sup> war hent : en o harg.

<sup>10</sup> na sort ‘deu war e giz : mired a reont an oll draou, ne roont netra da zen.

<sup>11</sup> eur huz : eul leh ma kuzont an traou.

<sup>12</sup> a-bennadou : da viken.

<sup>13</sup> lien-groñj : al lien a zo dindan groñj ar veleien.

Nemed dre nerz, emeze, ne blegfont d'al lezenn !  
Setu an oll skwer-vad demeuz o feiz kristen !

Koulskoude peb den eeun ha peb den a-feson  
A houlenñ 'vo lakaet pep tra en e rezon :  
Ingali ar re-mañ 'vo gwell diêz atao :  
Med red e vo korda<sup>14</sup> ! pe vezo jabadao !

### III

'Barz er chabistr trizeg deuz an Ebesteled,  
Sant Paol a lavaras 'vel henn d'ar Romaned :  
« Peb den mad ha gwirion 'gle beza en peb bro,  
Doujet er penn kenta d'an oll lezennou 'zo. »

Med ar re-mañ harpet gand tud gweñv, diskiant,  
Paeet mad da youhal ! mezet a win-ardant !  
Ra kant mil fout-ha-kaer<sup>15</sup> deuz Sant Paol na zent all !  
Dreist-oll leh 'ouzont mad n'eus c'hoaz nemed tud dall !...

Ar gwall-gredenn, hirie, en bro ar Vretoned  
A zegas dem memor demeuz ar Chouanted,  
Hag eur vez eo gweled e chomfe Breiz karet  
Keid-all en dallentez war-lerh Broiou ar Bed !

Soñjit en dienez, er baourentez iskiz !  
N'eo bet gwechall on zud dindan tud a Iliz,  
Pa oa an deog o ren ! an Iñkizision<sup>16</sup> !  
An esklavaj dre-oll ! ar spont en pep kalon !

Gwelit hirie er Spagn, leh 'mañ o zroad er pal<sup>17</sup>,  
Dre oll leh int chomet kreñv mad ha dishual,  
Na pegen reuzeudig eo c'hoaz ar bobl izel !  
Rag dindanne n'eus ken 'med anken ha brezel !

Ar c'hoant e-meum-ni c'hoaz da zistrei war on hiz ?  
P'emañ ar Frañs a-bez o klask dem ar frankiz ?  
Ar wir frankiz leal, en galleg *Liberté* !  
A chom da virviken *gante* dindan gazell, yê !

Daoust ha ni 've barnet da chom atao war-lerh,  
'Vel gwir genaouerien da lipad ar zah-kerh<sup>18</sup> !  
'Vel tud gouer<sup>19</sup> hag abaf ; 'leh mond war an a-raog  
Gand poellder ha kalon ! da zivenn on zamm krog !

Petra 'meum da hortoz a-berz brini lontreg ?

---

<sup>14</sup> korda : stoui.

<sup>15</sup> fout-ha-kaer : ne reont foulre kaer nemetken.

<sup>16</sup> Iñkizision : galleg.

<sup>17</sup> o zroad er pal : mistri int.

<sup>18</sup> lipad ar zah-kerh : dastum an traou louz.

<sup>19</sup> gouer : aonig.

‘Zo mil nao hant vloaz ‘zo war o hlud o prezeg ;  
Ragacherien gazuz o vralla o hloh faout<sup>20</sup>,  
‘Lar sklêr : « Degasit dem ! N’om mad nemed da gaoud ! »

Ha ne welit-hu ket emaoch en em skaota  
‘Vid kaoud kistin grillet deuz an tan d’ar re-ma’ ?  
O debr brao dirazoh eur wech ‘vint deut er-mêz ?  
Hag a hoarz goap en kuz deuz ho sempladurez.

‘Welit ket deuz talvoud da zerhel o skoliou,  
‘Vid na hellfom biken lenn sklêr en o hartou ?  
Digorit ho spered ! sellit mad en-dro deh<sup>21</sup> !  
Hag e welfot eo toull ar billig en peb leh !

Rag daoust deze d’ober skol ‘vid netra aliez  
E reont deoh paea ker ho leziregez,  
O tond en pep stumm all da zuna deoh ho kwad ;  
Al labour ‘reer ‘vid mann ‘vez kalz re ger dalhmad.

Hirie, kenvroiz ker, ‘zo dre-oll neventi,  
Ha kement ‘wel eun tamm hirroh ‘vid beg e fri,  
‘Zo skuiz o wel’d ar bed ‘n e zav dre vitrakou  
Ma houler ‘vo desket kaerroh traou er skoliou.

Penn an dud a skiant ‘zo torret gand kaozio’ !  
Ha n’eus ‘med an dud zempl da vond ken war o zro :  
N’ed’ ket gras d’o haoziou p’eo en desped deze  
E-meum hirie en Frañs kemend a liberte ?...

Peb gwir dad, ‘me kalz tud, a glefe kaoud frankiz  
Da zeski e vugel ‘vel ma karo d’e hiz ?...  
Se n’e’ ket gwir atao ; rag tad nan eus<sup>22</sup>  
Ar peurzod, da lakaad e vab war an hent treuz.

An den ne vo biken re gelennet er gwir<sup>23</sup>,  
Ha Gouarnamant Frañs ‘glee derhel stard d’e hir<sup>24</sup> :  
Mouez ar Bobl ‘deus laret mond distag d’ar pal krenn !  
Ha nikun ‘barz en Frañs n’hell mond dreist al Lezenn !

Piou ‘h a koulskoude ? pere ‘stourm ar muia ?  
N’eo ket ar seurezed, kredit, ar re wasa !  
Kement rumm aneze ‘deus pleget d’al Lezenn  
N’int ket tamm engagjet<sup>25</sup> na fourgaset gand den.

Ar re ‘dorr ar siell, an enebourien vraz,

---

<sup>20</sup> o hloh faout : faoutet eo o hloh.

<sup>21</sup> deh : deoh.

<sup>22</sup> nan eus : n’en-deus ar gwir.

<sup>23</sup> er gwir : e gwirionez.

<sup>24</sup> d’e hir : e her (tregerieg).

<sup>25</sup> engagjet : galleg.

Eo ar rummou ‘meum bet dirakom a-viskoaz !  
An dreitourien sourret ! paotred an drapo gwenn,  
Markizien, baroned, meneh ha beleien ! !

An daou rumm tud teñval ‘deu ‘tao deze ‘n em harpa  
Hag a garfe gweled ar bobl en ‘n em drailla !  
‘Zo en kuz o voustra, stummet gante o hlik<sup>26</sup>  
‘Vid gelloud deuz dindan mouga ar Republik :

« An avel ‘zo a-du, emeze, da wentad  
Ha da lakaad tangwall eo ingal pesort koad  
Pa n’om ‘vid dond a-benn *outi* dre votadeg  
Gand arhant ha *ruz-fall*<sup>27</sup>, ni ‘hell beza barreg ?

Kerkent ar stal ‘n he sav, roet e’an urzou  
Dre-oll d’ar seurezed da chom er houentchou ;  
D’ar re ‘oa bet eet kuit ‘vid douja d’al lezenn  
Greet deze dond war o hiz !... Red eo mond d’ar pal krenn !

Hag en-dreg pep kouent, dre an nerz kemeret !  
N’eus nemed kontezed, beleien, baroned  
O hisa ar bobl kêz ! war an dud a lezenn,  
Ar babouz ‘n o genou ! tamm heñvel deuz kristen !

A-daoliou baz-dotu hag a daoliou boutez !  
Eo e fell deze hirie sevel ar Gristenez !  
Ha riñsa podou-kambr war benn soudarded kêz !...  
Ar Bed oll ‘zo mantret ! deuz ker braz santelez !

N’eus ket pell ‘oa ranket kas soudarded a-leiz,  
Da rei eur gentel vad d’ar Chinoazed direiz :  
Ma ne gerom diwall ‘vo red kaoud ar Chinoa  
Da zond amañ d’e dro da zeski dem beva.

#### IV

Liberte ! Liberte ! a wahont sort biskoaz !  
Daoust pesort liberte ar foeltr a glaskont c’hoaz ?  
An hini da beurdrei ar bed war an tu-gin ?  
Da lakaad adarre ar bobl dindan o glin ?

Liberte da vouga koñsiañs ar re all !  
Da gas ar bed a-dreñv, evel ma oa gwechall ?  
Da vaga kasoni diwar-benn koz kredennou  
Na chomont ken ‘n o zav dirag ar skiantchou ?

Liberte da hweza brezeliou niveruz !  
Dond c’hoaz da venniga lahadegou spontuz !  
Da lakaad ar vinell d’ar houër a-nevez-flamm ?

---

<sup>26</sup> o hlik : galleg.

<sup>27</sup> *ruz-fall* : korvigell.

Da droha komz ar re 'ziskuill o doare kamm.

Birviken ken ! m'hen tou !... hag e houlont petra ?  
Liberte da zerhel ar Gaou noazuz 'n e za' ?  
'Gav ket deze 'n-eus renet pell a-walh evel-se ?  
Hag ez eo digoulzet rei liñs<sup>28</sup> d'ar wirione' !?

N'o-deus ket greet o gwalh evid diskar a-blad  
Al liberte ger-ze, gounezet gand on gwad !  
Gwall fentuz evelkent ! eo kleved eur seurt tud,  
O houlenn liberte d'o zro diwar o hlud !

Med o stal, a-blenn-font<sup>29</sup>, o dalh ! o c'hoant ! o le !  
'Zo krenn en kontrol-fet d'ar ger benniget-se.  
Liberte deze hepken ; med d'ar re all foeltr tamm :  
Peoh ha boued d'ar hliked<sup>30</sup> da vond dre an hent kamm !

Liberte da zispenn ar Republikaned,  
'Zo tremen mil diod o paea kanfarded<sup>31</sup> !  
Honnez n'eo ket ivez 'benn nebeud a amzer<sup>32</sup>,  
Rag mouez ar bobl 'lar deze : beva deuz ho micher.

O stal a zo barnet gand oll boblou ar bed,  
A houl ma labouro kement den a zebr boued !  
Rag n'eus den rediet da zastra e gorr paour  
Da bourvei deze magadurez hag aour !

Eun darn, peurgounnaret, o-deus distaget krenn  
Tremen hep paea ken na gwiriou na taks-penn<sup>33</sup> :  
Ali mad da laeron ! da vond warne a-vern ;  
Ma ne vez den d'o harz 'vo gennet ar hoz Lern !

Mar degouez reveulzi evel emaint o klask,  
N'e' ket war groug ar bobl e stardo an ask :  
E-barz en o amzer neb a houlenn kordenn  
Deuz e houk e-unan 'ray sur al lagadenn !

Gwechall pa oent Mistri o ouarn on zadou,  
Gwaz d'ar re a stourm tamm d'o gourhemenn :  
Barnet e vijent prest d'ar poaniou euzusa.  
An disterra ger treuz, d'an toull da zisheolia...

Hag hirie pa houlom lealded 'vid an oll  
E yudont 'vel pa ve ar bed o vond da goll !  
Liberte ! emeze, da zalla bugale !

---

<sup>28</sup> liñs : ? "rei plas".

<sup>29</sup> a-blenn-font : penn-da-benn.

<sup>30</sup> d'ar hliked : ar re a-du gand ar veleien.

<sup>31</sup> kanfarded : o enebourien.

<sup>32</sup> Honnez n'eo ket ivez 'benn nebeud a amzer : al liberte n'o-devo ket 'benn nebeud amzer.

<sup>33</sup> taks-penn : taillou.



Ni houlenñ kemend-all da sklêrijenna aneze.

Daoust h peleh emañ liberte mamm ha tad  
‘Rank kas o faotrezed d’o skoliou deze dalhmad ?  
Dreist-oll el leh n’eus c’hoaz nemed leanezed ?...  
Ni ‘houlenñ kreñv ma vo dre-oll skolaerezed<sup>34</sup>.

Eur rumm bennag,, ni ‘oar, evid golo aneze deoh<sup>35</sup>  
A lar ‘vel al Louarn pa oa tapet er pech :  
« Ma leuskit da vond kuit, ne dapin ken a yer ! »  
Hag e chomfom kousket war geriou ken dister ?...

Int nde glaskont frankiz ‘med evite o-unan,  
‘Le ni glask anezi d’an oll gwitibunan ;  
Med ni ‘lar n’o)devo biken gwir frankiz tra ma vo  
Paeet leanezed, beleien, gand ar vro ?

‘Benn ma’ ay mad an traou gand ar gwir Republik  
E ranko mond d’an traoñ pae kement ‘zo er hlik ;  
D’an traoñ ! Lezenn Falloux ; d’an traoñ ! ar zaeou du !  
D’an traoñ ! kement treitour ‘zo c’hoaz demeuz o zu !...

N’eo ket red kaoud eur zae gand eur werhted fentuz !  
Goud ober doueou, beva ‘n eur stad noazuz !  
‘Vid kelenn ar bugel war an hent mad ha fur  
A houlenñ da genta on oberou da stur ?

Ni ‘gred oll da Zoue, ha koulz hag hini ni ‘oar,  
Hep heuill o arvezioù ‘om dezañ ken tost-kar,  
Hag eun tammig tostoh, ma vefe sellet piz ;  
Pe anzañ ‘meum neuze eun Doue gwall iskiz !

Evid ma plij dezañ ar re ‘vir e Lezenn  
Hag a zalh an tosta da heuill e hourhemenn,  
Emaint eur gall flipad war-lerh ar bobl izel,  
Pe eo faoz ar hartou, ha kleuz an Aviel.

Emaon krog da ober war ze eul leor bihan.  
Ma lennit anezañ ne gollfot ket ho poan.  
Leh eo displeget sklêr an daolenn penn-da-benn,  
War Doue hag an Dud, ar Feiz e pep Kredenn.

Ne zalein ket ‘ta feteiz war gement-se ;  
‘Velkent a-raog kuitaad gand nerz e prouin deze,  
Emaint hag e vefont, hag a-viskoaz int bet  
Eneb da Lezenn Doue ! eneb da Lezenn ar Bed.

## V

---

<sup>34</sup> skolaerezed : skolaerezed e skoliou ar Republik.

<sup>35</sup> deoh : bet skrivet “dech” –eleh “deh”, evid rima gand “pech”.

## D'an dud a Iliz

« Hini<sup>36</sup> ar paour-kêz Krist 'oa re zempl<sup>37</sup> evidoh,  
Ma oa red deoh kroui traou sotoh pe zotoh,  
Da yenna<sup>38</sup> on arhant bep taol war ar bed-mañ  
Rag n'ho-peus foeltr doue na diaoul nemetañ ! ... ?...

C'hwi 'lar en em gared, ha na gerit den ebed ;  
Tad na mamm, na pried ; na bugel n'ho-peus ket.  
Renta 'r mad 'vid ar fall, gouzañv ha ardoni :  
C'hwi 'zo feulz ! venjañsuz ! ha leun a gasoni !

« Rentit 'ta da Sezar ar pezh 'zo da Sezar ! »  
« C'hwi stumm 'eneb dezañ dre-oll eun nerz dispar ! »  
« Ma lezenn, 'me Jezuz, eo hini an doujañs ! »  
Me 'wel oh dirollet ! prest da skuill gwad en Frañs !

An oll dud, emedoh, 'zo ingal raog Doue,  
Ha c'hwi 'ra eun dibab braz-braz evid yalh verr ar paour.  
Beza 'peus kroaziou stên evid yalh verr ar paour.  
D'ar pinvidig lorhuz, re arhant ha re aour !

Jezuz, gwisket dister, 'oa en tu ar beorien ;  
C'hwi, kaer ha lugernuz ! gand an dud a voaienn :  
Ken aliez ma vez votadeg en Frañs,  
C'hwi 'vez deuz ho kwasa o harpa an Noblañs.

Na stoui ket da hlin dirag traou ar bed ? »  
C'hwi 'ra dirag sent koad, dislivet, preñvedet !  
Labourit ! kreskit oll ! ha leugnit an douar ! »  
Ma rafem eveldoh, ar bed a ve war var !

Hag evel-se bep taol, a-eneb penn-da-benn :  
Nahet ho kwir Doue ! karantez 'vid kristen !  
Rediet da anzañ 'dalv mann ho kevridi,  
Hag emaoñ er stad-se 'vid beva dizoursi<sup>39</sup> .

Gwir dever peb den yah eo dougen frouez e wezenn !  
Ha c'hwi en gwir, tud lor, 'ra 'eneb eul le krenn !  
Stourm deuz nerz ar galon ! nah an enor kaerra !  
Hadet en gwad an Oll gand Krouer ar bed-mañ ! !

Daoust petore furnez ha pesort karante'  
'Hellfe gwrizienni en kalon bugale,  
Tud sourret, dizimez, gret dilez a bep tra<sup>40</sup> .

---

<sup>36</sup> Hini : Lezenn

<sup>37</sup> zempl : eeun.

<sup>38</sup> yenna : da hwiba.

<sup>39</sup> Hag emaoñ er stad-se 'vid beva dizoursi : **notenn gand an oberour** : Lennit ouspenn chabistr XXIII deuz Aviel Sant-Vaze, ag an hini ne gomzont kammed en o zarmoniou.

<sup>40</sup> gret dilez a bep tra : **notenn gand an oberour** : 'Vid eru gwel hepken.

Ne reont ket zoken o deveriou kenta.

Ar Frañs a houlenn tud ? Dimezit ‘ta d’ho tro !  
Heullit ar wir Lezenn, hag ar zae er bloto’ !  
Kalz gwelloh yel’ an traou, en pep stumm, en peb leh,  
Doue ‘n-eus tamm ezomm ho kwerhted diganeh !

Hoh-unan e lerit. Eñ ‘n-eus greet mad pep tra :  
Neuze n’oh ket krouet da chom d’ober netra !  
‘Vid ma sao kaer an ed e-barz er parkeier,  
Mar dalh ar Bed da gerzed, n’eo ket gras d’ho pater<sup>41</sup> !...

Kalz a zoug ar zae-ze a zo skuiz dindanni ;  
Rag hepti, c’hwi ‘oar mad, e heller ‘n em zalvi !  
Ha gounid kerkoulz all fiziañs or bugale  
Hag o helenn gwelloh war hent kaer ar vuhe’ !

Tra vo daou sort skoliou, disheñvel en pep tra.  
En eur memez broad, en beh deuz o gwasa,  
O klask gounid spered ha kalon an den kêz.  
Ne erruo biken ar wir unaniez ?

Ar peoh paduz amañ, ar gwir ententamant,  
Ne reno entrezo ‘med dre an deskamant ;  
Ha tra ‘vo urz da drei en gin penn ar bugel,  
‘Kendalho ho kasoni ‘trezom bete mervel.

Klaskit eveldom mammenn ar wir vuhez !  
Se n’harzo ket ouzoh da veza tud a feiz :  
Ar wir lezenn gristen ‘lar dond d’en em harpa  
Hag e karer Doue ‘n eur garoud an nesa. !...

Med eun huñvre ken kaer ne erruo ket c’hoaz  
Rag c’hwi ‘dorro kentoh evid plega, siwaz !  
Bountet gand tud lorhuz a oar mad eveldoh  
Penaoz eur wech maro ne vezer ket kalz welloh.

Med daoust ha d’ar rumm-ze da gredoud da foeltr sort  
O brasa stad a vez gweled ar bed-mañ tord,  
‘Vid yenna êzetoh ar bern pladeneien<sup>42</sup>  
A gouez dindan ho pao hag a gred ho lezenn.

Ar re-ze, koulz ha ni, ‘oar mad peleh emañ  
An dizanaoudegez, gouli braz ar bed-mañ :  
« Ar Bastill, emeze, ‘oa diskaret gand poan !  
Med sotich ar bobl-kêz ‘gouezo ket ken buan ! »

Ya ! tra ‘vo beleien, frered ha seurezed

---

<sup>41</sup> pater :ar bedenn...

<sup>42</sup> pladeneien :klapezed.

O vaga dallentez a vo gwaderezed :  
Krigerien all 'veldoh o stigma o lien,  
'Vel ma ra kevnid louz da dapoud ar helien !

Rag d' o heul 'vo biken 'med gevier, fals-soñjou !  
Istoriou kemmesket da drei ar sperejou !  
Da harz ar skiantchou da zond war ar bale !  
Da zizhentchi bro Frañs diwar ar wirionez.

O oll nerz, eur wech c'hoaz, 'zo en deñvalijenn,  
'Leh 'teu ho soñjou fur da goueza en poultrenn.  
C'hwi 'zo tre 'vel eun ti, nerzuz e vogeriou,  
Ne chom den e-barz ma vez lezet disto.

« Senti deuz ho komziou, lezel hoh oberou ? »  
Eur seurt lavar hepken a zispenn ho roudou ;  
Rag se 'lar sklêr d'an oll emaoñ war an hent fall !  
Hag ez eo ho tever touelli ar re all.'

*AMEN*

## VI

Greom fae, kenvroiz, war o hoz kaoziou flour,  
'H a gand o oberou ken buan hag an dour ;  
Rag petra 'dalv prezeg madelez d'ar re all  
Mar chomit hoh-unan dalhmad war an hent fall !

Ne dalv ket sorhenni an ddu a gomziou mad  
Ma ne glasker en tu da gaerraad deze o stad !  
Pa n'eus 'med al labour hag an unvaniez  
Da lakaad 'vel breudeur eun deiz er poblou kêz !

Heskina eur hlañvour hep klask dodn d'her gwellaad  
'Zo lakaad eur palastr war gorre eur harr-goad !  
Ha maga dallentez gand mantell ar vertu  
'Zo bodenni paoniou ha dizurz a bep tu.

A-benn yac'haad an den deuz e dechou amañ  
E rankor da genta gweled sklêr dirakañ,  
Hag ar gwir sklêrijenn a zo er skiantchou  
Ha nann er burzudou nag er fals-kredennou.

Pa vezom sklêrijennet war hent ar Wirione'  
On anvefom gwelloh an eil hag egile ;  
Pa ouezfom oll a-bez om kirieg d'on gwall-stad !  
Buan gand karantez ni deuy d'en em dostaad.

Heñchet gand ar furnez, neuze, braz ha bihan  
A deuy d'en em harpa dre-oll gwitibuan ;  
Hag eun deiz 'vel breudeur, gand peoh ha lealded !

Ni 'vo war an douar er vras evrusted !

Hogen, kenvroiz ker, Gouarnamant Bro-Frañs,  
Ne glask 'med an hent-se, ker leun a esperañs !  
Hag e chomfom pelloh da enebi deuz se ?  
A-du gand ar higer ! ha ni ar paour-kêz leue !

Neuze eo red anzañ om sod-mad da staga !  
Ha ne dleom beza skoazellet war netra ;  
Rag ar re n'int ket skuiz o tougen an tretou<sup>43</sup>  
A ranko c'hoaz da heul dastum ar hoz tachou !

Ar Frañs eo ar genta deuz oll Broiou ar Bed !  
O klask gwellaad doare ar poblou hualet !  
Hag a-benn ma kerzo pobl Frañs yah ha didrouz  
'Ranko beza skubet ar gwiad-kevnid louz !

Dirag ar Sklêrijenn a laosk eun nerz dispar !  
An oll vasklou teñval a gouezo prest heb mar.  
Hag an neb a stourmo pelloh deuz kerz ar bed,  
En-kreiz ar gorventenn a vezo bruzunet !

An Neñv a zalh a-du gand ar re 'n em zikour ;  
Ha reuzeudig eo 'tao e vrasa enebour.  
« An niver 'ra lezenn ! », « Mouez ar Bobl, mouez Doue ! »  
« Spered ar Bed o kerz eo e Spered ive' ! »

A-benn ma 'n em gavo ar Spered-se da ren  
Sikour plennaad an hent eo dever peb gwir den ;  
Hag eur wech ma vefom oll unanet en hent mad,  
Ni 'zanto dorn Doue o rei deom e vennad !

**Ch. Rolland**

Gwerliskin, d'an 10 a viz Eost 1902.

---

<sup>43</sup> an tretou : an harneziou.